

**Fichenn enskrivañ d'an DEVEZH-STUDI
d'ar Sadorn 25 a viz C'hwevrer 2023**

Da gas da : **KEAV 22 Hent Moulouen 29000 KEMPER**
pe da : **keav@keav.bzh , s.le.bozec@orange.fr**
pe **sofilehunsec@gmail.com**

ANV + ANV BIHAN.....

CHOMLEC'H

Pgz E-mail.....

Dont a ran dre ar stummerezh dibaouez :

Priz an devezh : 40 € (= skodenn vloaziek : 5€

+ mizoù pedagogiezh ha pred : 35 €)

+ Priz an devezh evit ar studierion ha tud o klask labour :
35 € (skodenn : 5 € + mizoù ha pred : 30 €)

Tud ampechet : mont e darempred ganeomp.

D'ho kelaouiñ : Skol-hañv K.E.A.V. 2023

Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Div sizhunvezh-studi a vo kinniget ar bloaz-mañ c'hoazh :

- ❖ **Ar prantad 1añ** : eus ar **Sul 09/07** da noz
d' ar **Sadorn 15/07** a viz Gouere da greisteiz.
- ❖ **An eil prantad** : eus ar **Sul 16/07** da noz
d' ar **Sadorn 22/07** a viz Gouere da greisteiz.

***Bez e c'hellit dibab chom ur sizhunvezh hepken,
pe chom an div.***



KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION

a ginnig deoc'h un **devezh-studi** diwar-benn :

1 : Penaos gwellaat e vrezhoneg ?
Un dremsell war implij gerioù ha stummoù zo
e bed ar vrezhonegerien nevez deut d'ar yezh.

Gant Pier-Iwan Kersuleg

2 : Barrekaat ha bezañ emren
war diazezoù brezhoneg KLT

Gant Mikael MADEG

D'ar Sadorn 25 a viz C'hwevrer 2023

ROLL AN DEVEZH

Adalek 9 eur 1/2

Degemer ha banne kafe

Da 10 eur nemet 1/4

gant Pier-Iwan KERSULEG

Penaos gwellaat e vrezhoneg ? Un dremsell war implij gerioù ha stummoù zo e bed ar vrezhonegerien nevez deut d'ar yezh.

Graet e vez bremañ, e bed ar vrezhonegerien nevez deut d'ar brezhoneg, gant un aridennad gerioù pe patromoù sintaks 1) na vezont ket implijet tamm e lec'h ebet gant ar vrezhonegerien a-vihanik pe 2) a vez implijet en ur mod all pe gant ur sinifikasion all gante. E-serr lakaat ar gaoz war ar gerioù hag ar stummoù-se e raio P-Y Kersuleg anv ivez eus ar pozioù, liv ar galleg warne, a vez kavet roud anezho e brezhoneg skrivet abaoe amzer ar brezhoneg-krenn, hag a vez implijet stank e brezhoneg komzet ivez. N'eus ket ul listennad divent deus oute, mes brav vefe d'an danvez-kelennerien en em soñjal war ar skoilh ma c'hell bezañ ar gerioù-se ma vez c'hoant da dostaat un tamm d'ur brezhoneg komzet bennak.

Pier-Iwan KERSULEG : Añrejstret en deus bet un tamm-mat a vrezhonegerien a-vihanig en ur ober un ugent vloaz bennak, ba Bro-Gernev ha ba Bro-Gwened dreist-holl. Goubec'het eo da studial brezhoneg an Enez-Sûn abaoe un herrad, ma zo bet embannet ul lev'r war tem ar beskerezh en Enez gantañ, skrivet asambles gant Yann Riou. Daou ziksoner a zo war ar stern gantañ : unan war brezhoneg Kêr hag unan all war hini Bro-Gwened..

Da 12 eur 1/2

Merenn

Da 2 goude merenn

gant Mikael MADEG

Barrekaat ha bezañ emren war diazezoù brezhoneg KLT

Ur brezegenn ne vo ket, met kinnig poelladennoù d'an dud war pouezmouezhiañ, peurober gant ar c'hensonennoù dibenn-ger, difaziañ an distagadur, penaos prientiñ lenn a vouezh uhel un destenn. Mat e vefe d'an dud bezañ en em genteliet war ar reolennoù diazez araok an devezh-studi, displeget e « *Traité de prononciation du breton du Nord-Ouest* » da skouer, da Mikael Madeg da lakaat ar stajidi da bleustriñ dre ober diouzh ar reolennoù ha ganto, ha da riñsañ par ma c'heller ar fazioù « *tadu* » « *anavezet mat...* »

Ur poentig ouzhpenn : an « *distagañ ordinal* » eo boaz Mikael Madeg da welet : penaos berraat ur frazenn dre gomz.

Kaset e vo gantañ leoriou ha CDiou da werzhañ ha leorioù da reiñ ivez.

Mikael MADEG : O chom e Bro-Leon emañ Mikael Madeg. Ouzhpenn e varzhonegoù, e zanevelloù hag e romantoù niverus bras ez eus embannet un toullad eus e oberennoù studi hag enklask diwar-benn al lesanvioù e brezhoneg, lec'hanvadurezh Bro-Leon ha temoù all evel ar bezhin, ar c'hleuzioù, an divyezhegezh abred, ... na pa ve ken.

'Tro 5 eur – 5 eur ½ Bilañs an devezh-studi